



CANTIC SPIRITUEL

EN ENOR D'AN ITRON SANTES-ANNA AR PALUD

*Eur plaç santel a zo en escoply Querne
e parrous Plounévez-Porsay, a dost d'armor*



VAR TON: Santez-Mari, Mam Doue

Me ho ped, Tad Eternel, crouer ar firmamant,
Roit d'am speret sclerijen, Done oll- buissant,
Da disoloi eua tensor a zo e Breiz-Izel,
E touez ar Vretonet leuz a graçou santel.

**Guer'hez glorius Vari, me ho ped. ma sicouret,
C'hui Itron San es-Anna zo enni enoret.
Evit discerian d'an oil ho c'raçon excellent,
Hac ar miraciou a ret. Rozen ar firmaman.**

**En escopti a Guerne e bordic ar mors glas,
E parrous Piounevez-Porsay euz eur zoursen a chraç,
Eur plaç leun a viraclon, mar deuz var an douar,
Batisset en eur blenen dirac an eol par bar.**

**Cals euz a plaçou santel a veler batisset,
D'an Itron Santes-Anna, e peb 'ec'h enoret,
Balamour ma ra bemde nombr bras a viraclon,
Hac er mor hac en douar c'cleo hon pedennou.**

**Mæs hep choqui, nep chapel zo dezi batisset,
E deuz eur plaç santel er Palud biniquet,
E leac'h ma zec enoret guir vam-goz hon Salver,
Gant an oil belerinet demeuz a bep quartier.**

**Ar plaç man zo frequentet gant guir devotion,
Gant ar gristenien fidel demeus a peb canton,
Abalamour ma e deus roet cals a soulajaman,
Ha ma obten ar yec'hel da gals tud languissant.**

**Pobl an escopti Querne, c'hui a zo eurus,
Da gaout en ho touez guir vam-goz da Jesus :
Deut oil da c'houlen outi ar c'hraçon necesser,
A galon vad d'e fediu d'ho tivoall dioc'h danjer.**

**O Itron Santes-Anna ! bremâ ma sicouret,
Pedit ho merc'h ar Ver'hez da rei d'in ar speret,
Ma c'hallin dre ho sicour comz eus ho miraclo,
Hac eus ann oil joausdet a laquet en hon bro.**

**C'hui oc'h eus plantet ar ros elec'h ma oa ar spenn,
Ha gret hent ar baradoz eus ann hent ann ifern ;
C'hui oc'h eus bet distroet pec'herien caledet,
Hac o laquet da vezan tud santel ha parfet.**

Me ho suppli, tud devot, chelaouet a vrema,
Coms demeus ar miraclou a ra Santes-Anna,
Ma teufot oll a galon d'ar Palud d'e guelet,
Ha ne goll quet ho poan dre graç Salver ar bed.

Eus ar parres Plougastel voa eur bælec yaouanc,
Privet eus ar guelet, en devoa nec'hamant,
E spaç eus a dri mis, siouas ! en eur g'roll stat,
Hele lavaret oferen gant an drouc daoulagat.

Alliet oue gant e dud ractal d'en em vonestla,
E chapel ar Palud d'hor mam Santes-Anna ;
En debes m'harruas en deus ofereñnet :
Meulet ra vezo Jesus hac he Vam biniguet !

Eus a guichen l'ont-Abat eur certen plac'h yaouanc,
Bet tri bloaz gant anderchen, e devoa eals a nec'hamant
Eun ave e deus gret e chapel ar Palud,
Bet e deus ar yec'het a zirac calsa dud.

Eus ar guer Quemper eur potric daouzec vloaz,
E spaç a dri devez bet gant an divoada,
E vam a zisparras ofranç a galon vad,
Da Santes-Anna ar Palud, ractal e cess ar goad.

Ur balimant carguet, var e guenta beach,
Gant an tourman attaquet, o tremen Bec-ar-Ras,
Peder heur varnuguent entre an daou mour,
Perrissa a sonjent hep galloud en em sicour.

Ar c'habiten, den devot, hac e vartolodet,
Da Santes-Anna ar Palud o deus en em voestlet,
Dre ar graç a Zoue hac e vam goz Anna,
Rentet e voan en Brest, disanger ha gant joa,

Evit e drugarecat, a vœu o deveus gret,
Dierc'hen er Palud ha en corf o rochet,
Gant pep a pited-coar evit rei testeni,
Eus ho miracl quer caër, Mam ar Verc'hes Mari.

Eun den yaouanq, a uguent vloas oajet,
Pehini gant ar vrec'h a gollas a guellet
A ras cals a nec'hamant ha d'he vam ha d'e dad,
Guelet eur sor den yaouanq o coll e zaoulagat.

Ur personnach charitabl o allas timat,
D'e vaotla er Palud da Vam ar Verc'hes sacr ;
Ractal ma o deus laquet oferen evitât,
E recevas ar guelet dre c'hraç Santes-Anna.

En escopti a Leon e parres Pleudaniel,
E deus gret Santes-Anna ive eur miracl caër,
En androet eur plac'h iaouanq a zo bet attaquet,
Memes e quichon e dor gant eur c'hi arrajet.

Ar plac'h-man pa er goelas a gommanç da grial :
O Santes-Anna Palud ! hac a invoqueas ractal,
Dre bermission Doue, ar c'hi lampas timat,
Gant errach gant eur men, en abimas a voad.

Just eo c'hoas en hoc'h enor parlant eus ar graçou,
Oc'h eus obtenet dar bobi epad e klenvejou,
Ann dud oll en ho tier, siouas ! var ar guele !
Antier hospitaliou gant ar c'hlenvet lou-se.

A reo deus bet bonheur d'en em recomman di,
Deoc'h en o affliction Mam ar Verc'hes Vari,
A velér o tont bembalez d'ho chapel benniguet,
O trugaracât Doue da veza bet ar iec'het,

Soudardet, martolodet ne aller quet nombri,
An niver a ve guelet bemdez var dro ho ti,
O trugarecât Doue d'ho beza preservet,
En creis ann oll combajou, d'an danger ezposet,

Cals zo c'hoas a viraclou pere ne hanvan quet,
E deus gret Santes-Anna ar Palud benniguet,
En andret tud afflijet demeus a pep cartier,
Cet soulajet er Palud dre graç Mam hon Salver.

Tud cam, tud dall a bouzer e deus soulajet,
O rei ar c'hle vout, ar gullet hac an nerz da guerzet,
Cals bugale languissant o deus santet e c'hraç,
An oll a receo yec'het enni bian ha bras.

Ha bagou ha gobiry e deus preservet,
Ha tud c'neet er mor, pa zint dezi en em voestlet,
O deus bed recouret o buez disanjer.
Ere graç Santes-Anna, guir vam-goz hor Salver.

Pobl eus a Douarnenez, me ho ped, ne vanquit quet,
Pa en em geuffot en danjer, troët pront ho speret,
Oc'h Santes-Anna ar Palud pedet a galon vad,
Da zonet d'ho preservi, guir Vam a Verc'hes sacr.

Quement en emgav nec'het gant an affliction,
En em voestlet er Palud gant guir devotion,
Ha mea ell assuri gant guir fidelite,
E teuffet jeaüs d'ar goæ, en eur veuli Doue.

E pevar c'horn ar c'hartier approuvet gant an dud,
A c'hraçou qu'en necesser, a receiver er Palud,
E Brest hac e Landerne. e Faou hac e Quemper,
E santer ar garantez e vam goz hor Salver.

Conquerne, Ene-Tudy, Penmarc'h ha Pont-Abat,
E Pont-Croas, e Gouiens e quever testou mat,
En o afflictionnou o deus-y invoquet,
Au Itron-Santes Anna o deus-y exaucet

Bep meurs epad mis eost ez eus induljançou,
E Santes-Anna ar Palud pardon d'hor pec'hejou,
A nep a rañ a galon eur govesion vat,
A recevo corf hor Salver gant eur feiz admirabl.

Nep en deus devotion da zont d'ar pardon bras,
D'ar zul diveza a vis eost emâ ar zourcen a c'hraç :
An deiz-ze e deus choaset hor mam Santes-Anna,
Evit beza enoret gant oll dud ar vro-mâ.


O coves o communia da zevez ar pardon,
E Santes Anna ar Palud, gant guir devotion,
Eus indujanç plenier gant ar Pab accordet,
D'an oll gristenien fidel a zeu d'e darempret.

Me o suppli, christenien, douguet a galond vad,
Eur chapelet en enor da Vam ar Verc'hes sacr :
Deut de lavaret a galon hep meurs, vanquit quet,
En enor Santes Anna, e viot recompanset,

Deut moia ma vo possubl d'ar Palud d'e guelet,
Da visita he chapelet he feunteun biriguet,
Ila me assur, goulennet ar graçou a guerret,
Gant eur galon prepalet, certen a recefet.

O Itron Santes-Anna, hor Mam hac hon Itron,
Hon recevet hoil bremañ diud'n ho protection,
Pedit hor Salver Jesus d'hor sicour nos ha de,
Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.





CANTIC

A VEULEUDI D'AN ITRON SANTES-ANNA

Enoret e Parres Plounévez-Porsay

E chapel ar Palud, a dost d'ar mor

VOAR EUN TON NEVEZ

Me hoc'h ador, ma Doue, eus a greis ma c'halon,
Hac a rent d'ho Majeste mil benecdition,
Da veza ho enoret ha carguet a joa,
Ar graçou accoardet d'hon Mam Santez-Anna.

O courcen an oll graçou ha leun a santelez !
Recevet hon c'halonou, Mam leun a vadelez,
Petra bennac ma omp indign eus ho protection,
Suppliet e Mab divin da accordin deomp pardon.

Itron gant Done caret, rosen mystérius,
A c'hanoc'h eo sortiet Mari, mam d'a Jezus,
An hini a oa choaset a bep eternite
Da garga a joausdet en douar hac an Env,

C'hui eo ar guir patrones eus ann dud eureuget,
Hac ar guir advocades d'an oll intanvezet,
Tensor an oll vertuziou, exempl ar guerc'hezet,
Hac eur vam leun a graçou da guement den ho ped.

Demeus a greis hon ene ha gant eur guir fisianç
Ec'h offromp d'ho carantez oll gouvernament Franç;
Pidit Done da accordin d'ar Fransij-n guir gristen
Ar c'braç d'a gaout ar victoar voar e adversourien

O Itron Santez-Anna ! bezit advocatez
Evit an oll pec'herien deo d'ho pedin bemdez,
Vit ar pennoù principalao zo ous hon difen,
Obtenet dezo ar c'hraç da souten al lezeu.

Recevet, mam biniguet, ni ho ped a galon vad,
Dindan ho protection hon Tad santel ar Pab ;
Ivez ar c'ardinalet hac an oll esquibien,
Hac ann oll dud a illis da gresqui al lezeu,

Sicouret, mam truezus, hon tud an armeoù,
Astennet ho torn eur eus ha peuc'h ar c'hombajou,
Chasset hon adversourien a bell demeus hor bro,
Ma vesimp fidei d'ho lezeu tre betek ar maro.

Obtenet, me o suppli, o Mam carantezus !
D'ar re zo en agout eur maro eureus ;
Obtenet digan Doue, d'ar groagues zo poaniet,
Badiziant d'ar vugale, ha d'ar yam ar iec'h et.

Hon tud hac hon oll madou a laqueomp oll gant joa
Dindan ho protection, Itron Santez-Anna,
Pedit an Drindet santel da zont d'ho pardonni,
Ma c'halimp dre ho sicour mon d'an Eav d'he veuli,

